

10. Kristennien Parrez Cleden
Chomomp oll unanet
Ma reno ar feiz Kristen
En hor parrez bepret.
Tadou, Mamou, bugale,
Ha c'hui servicherrien
En em garomp e Doue,
Hag an ti vo Kristen.
11. Kenavezo beleïen
Ni ro d'eoc'h hor bennoz ;
Ni a chommo da viken
Stard e feiz hon tud koz ;
Pa skoio var hon Ene
Taoliou an drouk spered
Ni redo varzu Doue
Gant hor pastor karet.

Imprimatur

Quimper, le 23 Mai 1913,

A. GADON, vicaire général.




Mission

DE

CLËDEN-POHER

du 4 au 22 Juin 1913



TON : Itron Varia ar Folgoët.
C'houi pere zo kristennien.

I

Parressionis a Gleden
Unanomp hor moueziou.
Kassomp oll dre hor peden
Da Zoue meuleudiou ;
Pa zeo deuet d'hor gervel
D'eur Mission benniget,
Derveziou kaër ha santel
Re vuan tremenet.

2. Oh ! peger mad eo beva
E skeud an aoteriou !
Pegen douz eo studia
Va Doue, ho lezennou !
Eur zizun ouz ho karet
A rent muioc'h laouen
Eget dek vloaz tremenet
E kreiz ar bec'herrien.
3. Kerkent a ma c'houlaoe
An deiz varnomp bemdez
Kloc'h hon Iliz hor galve
Gant he gaëra mouez ;
Hon tiez choume goulo,
Didrouz hor parkeier,
Ne zonent mui gant ekleo
Hor labouriou pounner.
4. An heol o vont da guzet
Hor guele en Iliz,
C'hoaz ennhi oll daoulinet,
Disoursi, drant, diskuiz ;
Ne ket ebken gant bara
E vev eürus an den,
D'hon ene evit beva
Ee ret ar skol gristen.
5. Tad Maner, Michel Nobletz,
Sklerijen Breiz-Izel,
D'hon tud koz gant karantez
Teskac'h an avel ;
Tridal dle hoc'h eneou
Pa velit o redek
Var ho lerc'h, dre ho roudou
Beleien kalounek.

6. Komz Doue ro sklerijen
D'ar sperejou dallet,
Ha roet e deuz souten
D'hor c'haloun dinerzet
Avechou 'vel ar gurun
Kuezet varnout, pec'her,
Ne ket evit da vrurun ?...
Sao da benn, kred, esper.
7. Bemdez en he barkeier
Dirak mestr ar bed ma
Penaos ve eul labourer
Ha ne gredfe ennhan ?
Ne c'hell ada eur c'hreunen
Heb gortoz heol ha glao,
Penaos ne rofe kreden
D'ar mestr ho digaso ?
8. Kaloun an den zo re vras
Evit beza karget
Gant plijadurioù divlas,
Gant uvreou ar bed :
Kristen, da esperansou,
Te divroet aman,
Dle mont betek an Envou,
Gwir vro an den a boan.
9. Doue genet dudiuz,
Ni fell d'eomp ho karet ;
Ni fell d'eomp karet Jesus.
Hag he Vam benniget
Ho karet en hor joaioù
Ho karet en anken
Ho karet en oll stadou
Ho karet da viken.